

Stel ma lâra Beatris : Gast a baotr ! Perak oc'h aet ken koulz !

Achuet en deus e zevezh skol dewezhañ é teskiñ ur ganenn nevez da 60 a vugale « Deomp ha deomp ». E dro oa da vout doc'h ar glud ar Gwener-se ha mall oa din achap (Stel n'hella arru a-wezhoù d'ar Gwener) ha me da lâret dezhoñ « Ne choman ket henoazh, ni en em welay dilun ». Ben pas ,Lun erbed ken.Gast a vuhez !

Getoñ 'm eus kroget da zeskiñ brezhoneg en UBS er c'hantvlead arall/. Eñ rae kentellioù a bep eil get Guy Le Bideau. Me gav genin e lakae poan é teskiñ brezhoneg din el oan ganet e Bihui an Dour stelloñ. E gentelioù oa bev, lan a fent: donet a rae get ur valotenn, ret e oa he zap ha respont d'ar goulenn. Me lâr deoc'h oamp karget a vrezhoneg a pa oa achu ar gentel.

Daou tri blez arlerc'h, ur bellgomzadenn 'm oa beta pa oan studierez e Kelenn. Yannig e oa. Ur skol Diwan é tigor e Pondi, eñ c'houlenne genin ma faote din bout ar skolaerez ketañ. Penaos inour !

Ha chetu me aet ha laret ya, hag arruet er skol er blez 2001, d an oad a zaou vlez arn-ugent. Douget getoñ ha get rac'h bezh an ekipad tud 'oa er skol 'm eus dalc'het da zeskiñ. Barniñ ne rae ket, broudiñ kentoc'h.

Pet gwezh 'm eus bet klevet « Oh kabidan Sabrina ».

E 2007 hon eus komañset da genlabourat. Stél en doa graet evidin 'm eus eñ gwelet é hadiñ gran : ar brezhoneg, ar c'han, ar flaouit. Ur wezh e oamp memp arru skuizh é klevet ar vugale é flaouitaat er porzh skol. Kavet en doa ur lesanv d'e skolidi ar blez-se « Flaouiterion ar Blawezh » kement a jourdoul oa gete é flaouitaat tonioù nevez.

Beviñ ha kompren ar pezh zo tro-ha-tro deoc'h oa a-bouez evitoñ: ar Blawezh, an evned.... Lan a sonjoù evit ar skol betek an deiz dewezhañ. Kant mil skouer e hellan reiñ deoc'h ag ar pezh a zigase d'ar vugale ha deomp-ni ivez. Pep hani anezhe merchet getoñ evit james.

Eh an d'achu get komzioù ur skoliad dezhoñ arru er skolaj bremañ.
« Trist on evit e familh met trist on ivez evit tout ar vugale n'o do ket

ar chañs da vout en e glasad. »
Sabrina



Foto klas CM 2019 /2020 Skol Diwan Pondi